

(94, suite)

Recit Curius

Eus ar pezh a zo bet êruet en Montroulez, var sujet
ar Religion, adalec ar bloa 72 goude Guinivelezh
hor Zalver, betek an 8 eus a vis Guengolo,
deiz Gouel ar Verc'hez, er bloa 1834.

Var ton Christ bras ar Vur.

Guerc'hez glorius Vari, Patronez Montroulez,
C'houi a voe en peb amzer hor giir advocatez,
Deurvezit, mar plij ganêc'h, cundui va fluen,
Ma rin amân eur recit d'am breudeur christenien.

(95)

Anez ho protection, o Guerc'hez adorabl,
Drouest d'am oll bolonté, bigen ne ven capapl
Dor zonet da gomposi d'am brois eur recit
Pehini a vez c'aret dign demeus a verit.

Mes crén demeus ho sicour, e zân da zisclêrya
Traou hac a interesso christenien ar vro-mâ:
Mont a rân d'o merca d'êc'h amân var ar paper;
Selaouit oll, me ho ped: antren rân en matter.

Bremân eta, Bretonet, vit rêi d'êc'h da entent,
E zeus just seitêc cant vloas ha tri ha tri-ugent,
E tiambarcas amân, evit hor boneur-ni
Drennalus, qenta Disqib Joseph d'Arimathi.

Derdent e convertissas an oll Montroulezis,
Hac er penn eus ar c'hoc'hi e constru eun ilis
Pehini voe dediet d'an Autrou Sant Jacques,
Ar qenta ilis christen eus a querc Montroulez.

En traon eus ar ru Feunteun e sav eur golonen,
Var beg pini e lacas neuze Croas-al-Latern, (1)

(1).- Ar groas coër-ze a voe dispennet gant ar revolution quenta. Ar bobl a lavare:
pa vo discaret ar groas-se, e vo beuzet qær.

Hac eus an troad e placas güir bortret Mam Doue,
Elec'h ma talc'het goulou hac en nös hac en de .

Aben nao bloas ha trêgont goude maro Jesus,
E voump-ni-ta christenien, dre soignou Drenmalus;
Ze a voe abers Doue eur bredilection
Da vea bet qerqent-se ar güir Religion .

(96)

Ar Feiz o vea cresqet er guær a Vonthoulez,
E teujot da vatissa hon ilidou pares,
Coüentchou ha Chapelou, dre zël ar vourc'hisien,
Voa devot bras d'ar Vere'hez ha scouer d'ar gristenien .

Er blavez unec-cant-dec, voe da guenta fontet
Bars en ilis Sant Varze brewiez an Drindet.
Sant-Martin, Sant-Maloani, Sant-Jacques, Sant-Varze
A voa peder Prioldi a venac'h d'ar c'houlz-se .

Hac er blavez daouzec-cant eiz ha trêgont voe grêt
Coüent caer Sant-Dominic, ha qerqent dediet.
Eno voa pales an Duc, e verjer, e jardin;
O rëi oll a ras d'ober eun Templ d'hor Mestr divin .

Gant plijadur, Bretonet, e clêfot, me zo sur,
Peur e voe fontet ilis Itron Varia ar Vier.
Er bloa daouzec cant pemzec ha pevar-ugent voe
Commancet ilis Mari, Mam d'an Aoutron Doue .

Deiz Gouel Mari Anter-Eost voe fontet ar chapel
Er plaç choazet gant an Duc, en traon eus ar c'hastel;
Laqat eure eiz bêleg vit ober an offis,
Ar peiz a gargas a joa an oll Vonthoulezis .

(97)

Ar gouel-mä voe digoret dre eur procession,
En pini voa eur foul vras, leun a zevotion:
Er penn aroc voa an Duc Yan daouvet a hano,
Bêleyen ha Bourc'hisien, hac oll Noblañç ar vro .

Ar Provincial a Franç voa an eil assistant;
Escop Dol, e[scop] Naonet a voa ive present,
Guillou eus ar Roc'h-Tanguy, Escop eus a Roazon,

Ha Guillou a Kersauson, Escop eus a Leon.

Unnec vloas ha tri-uguent goude ar Gouel caer-mâ,
 Deiz anter. Éost voe placet neuze ar men genta
 Eus ar Porchet magnific demeus ilis ar Vur;
 Aementse zo affirmet deomp oll dre seridou sur.

Demeus ilis Sant-Vazge voe neuze transferet
 Da ilis Vari ar Vur Breuriez an Drindet,
 Elec'h ma zgo bet heuillet gant givir devotion,
 Bete ma voe commencet ar Revolution.

(98) Er bloa pèvarzhec cant eiz ha tri-uguent e voa
 Dedit ilis ar Vur d'an Itron Varia:
 Ar vrassa solemnite a voe neuze eno;
 Tud a voa en em gavet a bèvar c'horn ar vro.

Ur bloa ha triegont goude e voe fontet enni
 Breuriez ar Chandelour, en enor da Vari,
 Dre eur Bul demeus ar Pab Alexandr c'hoec'h hanvet;
 Guillou Guicason 'r Provost, en d'oa e goulennet.

Dec vloas goude, a nevez e rejot construi
 Divar goust tud ar baros, ilis Sant-Malami;
 An tour a voe construet ive neuze ractal,
 Ha chapel Santez-Barba en qichen an nör-dal. (1)

Yan Calloet a Lannidi, escop a Landreguer,
 A zedias Sant-Vazge cazi 'r memes amzer,
 Hac a fontas diou zerrich evit ar re varo,
 Ar pezh a grescas fervor christenien vad ar vro.

Ebars er blavez pempzec cant eiz ha daou-uguent,
 En dec eus a vis here, dre c'hraç Roue ar Tent,
 Voe batisset an Tour a ilis Sant-Vazge,
 Pini hon eus ar bonneur d'admira c'hoas hirie.

(99) Er bla c'hoerzhec - cant unnec neuze e voe prozet

(1)...Chapel Santez Barba a voa en plas an tij bian zo entre dor ar presbital
 Sant Malami hac ar parziniou bras.

Ar men genta fondamant eus ar Gabucinet.
 Eur gurun an horrupla, seiz vloas just goude-ze,
 A ziscar beg Tour ar Vur; an oll a spouronne.

Unnec vloas goude 'n dra-mañ, couent caer Sant-Frances
 A voe neuze construct, tostic da Vontroulez;
 Hac aben daou vloas goude, Outrou Escop Treguer
 A ras eur procession partout endro da guær.

Demeus a ilis ar Vur e toug ar Sacramant
 Gant calz a zolemnité hac eur galon fervant
 Betec Ihs ar Feunteun, elec'h m'oe instalalet,
 Goude an offiç divin, ar C'harmiliterjet.

En c'hozec cant eiz-varnugent, Processionou qær,
 Deiz Sul ar C'hasimodo, n'em rentas er C'halver, (1)
 Erit beniga Croas caer ar Venedictinijet,
 En penn eus ar ru Blouyan, en pelec'h voe plantet.

En Montroulez ezous c'hoas bet, mes pell goude-ze,
 Gouelioù caer, Missionou, dre ar c'hraç a Zoue.
 An dud cõs a Vontroulez n'o deus get sur ancouet
 Sant Fidel ha sant Loranç eus ar Gabucinet. (2)

Pêvar bloas ha tri-ugent zo voe Sant-Martin dêvet
 Gant an tãn eus an ênvou voa varnerji coezet;
 Ur bloa varnugent goude voe grêt unan neve,
 A zo eur peç ar c'haera a veler er c'hontre. (100)

Gent ar Revolution e velet er guær-mã
 Chapelou ha couentchou, ilisou ar c'haera;
 Pere a vije carguet bepret a dud fidel,
 Da zerrichout da exempl d'ar oll en Breiz-Izel.

Trivac'h Ihs ha Chapel voa en dalc'h Montroulez;
 Ihs ar Vur viniquet voa evel ar vestrez;
 Sant-Vazge, Santez-Maharit, ilis Sant-Dominig,
 Hac en traon voa 'r chapel gõs a Zantez Veronig.

(1).- En tiz bras an amissioner.

(2).- Canonisation S. Loranç en 1785. - Er Vur e voa ar mission gallec; an himi brezonek en 5^e Vazge.

Ar Gouent, Santez Martha, ar C'harmilitezet,
Ar Vadalen, Sant-Nicolas, hac ar Gabucinet,
Ar C'halver, Sant Malani, Sant Frances, Sant Martin,
Itron Varia a Vertu, Chapel Sant-Augustin.

En Hospital voa ive eur Chapel ar gaera,
Hac etal Sant Malani chapel Santez-Barba,
Ah! nac a blaçou santel a voa en amzer-ze,
Elec'h ma rentet bemde hommachou da Loue!

(101) Placer ilis Sant Jacques a voa goechal ornet
Eus eur Groas men, ar gaera a oufjet da velet.
Sant Jacques ha sant Christoph; peziou voa hep o far;
Mes brizillonet int bet eno gant tud barbar!

Ebars ruyou Montroulez ne rêjet qet ur pas
Hep eus hon Religion quielet mercou all c'hoas:
Perrier qer, calz a dies a zent voa decoret,
Mes, evel an ilisou, int bet oll distrujet.

Er bloavez mil seiz, cant seiz, an ugent a vouere,
E varvas Frances Jagu, Person a Sant-Vazze,
Leshanvet ar Vigel-Zant dre bêvar c'horn ar vro:
Pedomp-én a wir galon, Doue hor sicouro.

E blijadur voa bepret ober vad d'ar beorien,
Hac eus a greiz e galon instru ar gristenien;
E vertuz, e veritou, hac e vezz santel
A ra ma zzo veneret dre oll en Breiz-Izel.

En penn bêred Sant Vazze, a harp ouz ar garmel
Aziouc'h e vez voe savet d'e enor eur chapel;
Eno an oll admire poltret ar Vigel-Zant,
Ofer joais, ma lavarjet e vije o parlant.

(102) Nac a vugale yovuanc zo bet deân goestlet,
Erit goulen e zicour ebars en o c'hlenvet!
Quielet a reomp bemde graquez o vont gante
Da accomplissa voeuou grêt d'an den zantel-ze.

Calz a dud zo o tepori ma vo canonizet;

154

Ni, Montroulezis, hon eus atao ze deziret.
 Pedomp Doue a galon ma velimp an dra-ze,
 Hac ive plaç e imach en ilis Sant-Vaze!

Pelec'h emedi 'n amzer en pini e velet,
 Achappet eus an tempest, hac er pors êruet,
 Ar vartolodet christen o tont d'accomplissa
 Voeyou da ilis ar Vur, en eur stat an trista!

Eus o lestr e partient, hep habit na besten,
 Hep toc, na louer, na boutou, en o dorn eur cierge,
 En eur gana assambles Ave, Maria Stella,
 Ar peç certen a laçe peb calon da ranna.

Rentet en traon 'r pasiniou demeus an Templ divin
 En em stringent d'an douar var bennou o daoulin;
 Pardon! pardon!, emeze; pardon, ô Mam Doue!
 Penevent ho madelez ne voamp get en bue.

Newze 'pignent d'an ilis, leun eus a drugarez,
 Elec'h ma vije canet d'ê ofern ar Verc'hez.
 Pebes fervor o devoa! pebes devotion!
 Ah! pebes triumph ive vit ar Religion!

(103)

Ret e din despeigni d'êc'h breman ar Verc'hez-mã,
 Rac calz ac'hanoc'h biscoas na velas eur sewit tra:
 Sellit hi pequen tener, pequen corantêzus
 E teu da rêi da zena d'êc'h Mabic qes Jesus!

Pequen admirabl e zeo e gûelet digoret,
 En he c'hreiz e contempler tri Ferson an Drindet,
 Hac en he diou gostezen e veler gant eston
 Peinturachou ar c'haera eus ar Religion.

Nebent Touriou a velet, me a ell en assur,
 Da veza comparachet demeus Tour caer ar Vur,
 Nac ilis a inspire mui a zevotion
 Equet sur ma rê hini hor Mam hac hor Itron.

Ebars en amzer horruibl ar Revolution
 Ne velemp en dro demp oll nemet destruction.

Hac eun dra ar c'hruella voa güelet a dra zur
Dont da zistruch, dre arnach, ilis santel ar Vur.

(104) Hor Batronez voe neuze chaset eus he zy,
Casset da Sant-Dominig, hac ar C'hrist bras ganti;
Ha goude e voent placet en ilis Sant-Varge,
Mes ar Verc'hez zo hirio en eur chapel neve.

Pa voe distrujet ar Vur er Revolution,
Voe grêt anezi eun Templ, hanvet Templ ar Rêson;
Mes rên an Douees-mân ne badas get goal bell.
Ne eure nemet tremen, vel ma ra an avel.

An ilis a voe neuze souden eta güerzet,
Ha qerqent e voe ive en antier discaret;
An Tour a chommas neuze izolet goude-ze,
Hep souten en nep coste evit e sureté.

O Doue! pebes maleur a êruas goude!
Fremissa ra va c'halon pa zonyân c'hoas en ze....
Va goad a deu da sclassa, va daelou da redet,
Va fluen a quên em dorn, va speret zo troublet.

Goude lein, vardro un heur, Tour ar Vur a fraillas,
Ha gant eun drous hornerus prest ractal a goas; (1)
An oll dud eus ar c'hartier voe qement spouronet,
Ne vouient pelec'h tec'hel nac en pelec'h monet.

(105) Ar Mêr hac ar Souprefet qerqent a êruas,
Ha calz demeus a guêris ive en em rentas.
An oll voa leun a galon evit douguen sicour
D'an dud a voa entêret eno dindan an Tour.

Ar Tacrist voe ar c'henta a deujot da gavet.
Beo e voa, dre c'hraç Doue; mes, allas! goal vlesset...
Pemp den all a voe lazget, hac eur buguel nao bloas
Voe casset dindan eun dol, mes emân a vev c'hoas.

An drizec a vis Even eus bet seitec vloas, voe

(1)--Deiz güener ar Groat 1806, dre eun amzer ar gaera.

Gouel canonisation santerz, Angél ive
Ebars er Gouënt-neve, elec'h ma voe placet
Evel quir fondatorez an Ursulinezet.

Sant-Vaige, dre e c'hosni, a voa bet condaonet
Da vea prest discaret, hac e voe en effet;
Mes dre generosite christemien Montroulez,
E voe construct goude eun ilis gaer nevez.

An deiz diveza gerzu, mil eiz cant pemp varmuquent,
E voe beniquet an ilis dre c'hraç Roue ar Zent;
An deiz varlerc'h, ar c'henta demeus a vis quenver
Voe an oferen quenta ebars templ hor Zalver.

D'al lun, eiz a voengolo, er blavez tremenet,
Chapel Itron Vari ar Vur a zo bet dediet;
En penn b'ered Sant Vaige, gant calz solemnite,
En pelec'h voa n'em gavet nombr tud eus ar c'hontre.

(106)

Autrou ?ⁿ Abbat L'ansalut, Chaloni c'os ar Vur,
A venigas ar chapel gant eur joa nobl ha pur;
Autrou Kervennic, person eus a barros Taule,
A germonas ouz a harz croas cañer ar Jubile.

An oferen voe canet bars er chapel neve,
Ha da deir heur gousperou en ilis Sant-Vaige.
Autrou Graverand, Person Brest neuze a Brezegas
Var ar sujet a zalc'he d'ar solemnite bras.

Qerqent ar procession a zo bet commancet,
Hac Itron Vari ar Vur gant b'eteyen douquet,
En eur gana melodi Mari, Mam da Loue,
Ha neuze voe deposet en he chapel neve.

Güechal en ilis ar Vur e vije ar Pardon
Deiz gouiel an Drindet santel, gant peb devotion;
Breman vo hivisigen grêt er chapel neve,
Elec'h ma vo celebret gant peb solemnite.

Güel't a reomp hirio, gant calz demeus a joa
Eun ilis c'os rentet demp, abandonet pell voa:

(107)

Coüent Sant Frances, elec'h ma voa Reolezet,
Hac a zo breman dalc'het gant al leanezet.

Cetu arze, Bretonet, ar pey zo êruet
Er queter eus a Vontroulez, en amzer dremenet.
Contant ven eus va recit, ma elfe dont abenn
Da gresqi ar giür fervor etouez ar gristenien.

Gement-män zo bet reizet ebarz euy urz neve,
Am daouzec eus a vis mae, deiz pasq ar vugale:
Graç deze da gaout sonch ouz eun deiz qer glorius,
Hac da veza da vigen bugale da Jesus.

Ar voery-män zo composet gant calz a blizadur,
Gant eur C'holistr ancien eus a ilis ar Kur (1)
Pini zo bet test giürion demeus a veur a dra
Arzo da anaveout ebarz er recit-mä.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 94-107.)
strophes non numérotées.

(1).- A. Lédan.